

Chanson Nevez

COMPOSET GAND AN DEN YAOUANQ EUS A BAROS CORAY

PEHINI ZO BET TRAHISSET GAND E VESTRES

Var an ton joaus.

Didostet tu ma faros,
Didostet d'am chilaou,
Men ia da explica d'eorch
Ebars ar berr gomsaou

1.

Pez zo ganign erruet
A bouez var va c'halon,
Trahisset gand va mestres,
Ar plac'h quen diraison.

2.

M'en m'o choaset ar vestres
Ar herra e vellan,
An hini agreapla
E oa ar bares-man.

3.

Rac hi eo an m'o choazet
Vit ma muia caret.
Mes dre ali ar goal deod
An deus va trahisset.

4.

A henta e m'o biscoas
Remerquet sort fleuris,
A oa da zevez ar parn
A chapel Garnilis.

5.

Eno pa m'o e guelet
Gand eur galon gontan,
Neuse e teont da zongéal
Da laret dign va unan :

6.

Ma am mige bet ar pouvoir
Da gozeal ganti,
Mige contet deñ va douaret
A clevet e hini.

7.

Pe oant deuit mez an illis,
Echu an offeren,
Men remerquas anezi
Eno var an dachen.

8.

Cetu men o songeal
Tosteal deouti,
Men va zoc em dorn
Evit e zaludi.

9.

Bonjour, salud, plac'h yaouanq,
Rouanez ar merhet,
Ty lacañ breman o torn
Hani o muia-caret.

10.
A gand eur galon laouen
Hi respontas dima :
Men a vezo da vestres
Quaït ma vem ar bed-ma.

11.

A goude oa debret merrenn
Eomp an daou assambles,
Betec ar chapel biniguet
Da bedi ar Verhes

12.

Evit rei domp ar chadenn
Demeus an amitie,
A da veza unisset
An eil gand eguile.

13.

Eno ar rest eus an de
A n'eomp bet tremenet,
O conta ar preposiou
An amser da zonet.

14.

A neur zistroñ dar guer
Pe oamp nim gavet an daou,
An eil laras d'egile
Vijomp bet priedou.

15.

Mes ar zulvez dabardes
Goude an offern bred,
Va c'halon abars em c'hreñs
E oa cazi rannet.

16.

O pe oant deut da glevet
Gant va c'hamarado
Lar pennos oant dessignet
Da servich an drapeau.

17.

D'an uguen a vis Guenver
Mo tennet ar billet,
Ar guer a C'hastel-Nevez
Pehini oant rentet.

18.

Dan de quenta a vis Mai
E reont passeal
Conseil ar revision
Do oa dign partial.

19.

Obliget oant da guitat
Va mestrezic fidel,
Va herenn, va mignonet
Ha va bro Breiz-Izel.

20.

Men o pet, Autrou sant Per,
Patron pares Coray,
Tollit var an den yaouanq
Eur zel a drugare.

21.

Da rei don ners a courag
Da souten e boaniou,
Beuzet eo et zaonlagat
En eur mor a zelou.

22.

Ar henta e mo goude
Remerquet ma mestres,
Oa o ton d'eorch an illis
Leun a dristidiguez.

23.

A cetu men o comprenn
Tosteal deouti,
Gand ar galon languissant
E lavarenn dezi :

24.

« Quemerit ta ar bluen
Men o pet, plac'h yaouanq,
A scrivit var va c'halon
Gant carantes ardant.

25.

« Pennos chomfech dam gortos
Queit vign pel eus o bro,
Rac ma teuit d'am delezel
Men houlenn va maro. »

26.

A hi respontas diman
Gand eur voues quent tener :
« Men a vezo da vestres
A c'hui va zervicher. »

27.

Mes allas deuit oa an heur
Ma rencan partial,
Vit mont d'ober va honger
Trous a guer a Laval.

28.

A hano oant bet casset
Da echui va zervich,
En eur ger hanvet Sant-Cloud,
An tu al da Baris.

29.

Pa vigenn o exerci
Eno var a blenenn,
Neuse e teuas song dign
E mo ar femelen.

30.

Neuse e teuas song dign
Eus ar plac'h ar herra
E mo losquet var va lec'h
Bars ar guer da vouela.

31.

Bep mitin pa zihuinan
E rean ar bedenn
Da va mam santes Anna,
Patrones Breiz-Izel.

32.

Silaouit ta, mam dener,
Men o pet ar galon,
A ty gasfet ar lizer
Tre betec ma mignon.

33.

O pedit ran da laret
Da hini a garan
E ma echu e gonger
Gand eur zoudard yaouanq.

34.

Maon hont da zistrei de vro
Quen joaus e galon ;
Adieu fusil a sabrenn,
Adieu d'am bataillon !

35.

A breman me a laro :
Debonjour, Breiz-Izel,
Debonjour deoc'h, tud va bro
A va mestres fidel.

36.

Mes aroc distroi da guer
Mo laquet em speret,
D'antreal bars an illis
Lech oant bet badezet.

37.

Ag eno mo remerquet
Marianic, ma mestres,
O pedi, o vedita
E hars treid ar Verhes.

38.

Pe voa deut mes an illis
Dezi mo lavaret :
« Didostet ta, plac'h yaouanq,
Cetu men erruet.

39.

Cetu men erru ar vro
Leun a blujadures,
Da lacañ fin do canviou
A do tristidiguez. »

40.
Neuse mo e hunduet
E dorn bars em hini,
Tre betec ty ar Person
Vit mont da zimezi.

41.
Pemp bloa e eus tremenet
Ato e nim heuiliomp ;
Ar garantès ar vrassa
Oa bepred etrezomp.

42.
Ar foariou, ar pardonniou
Ag e peb assemble,
Aroc n'im zispartial
An eil lare d'eguile :

43.
« Kenavo a laran d'eorch,
Kenavo an devez,
Da hortos ma vimp unisset
Gand Doue assambles. »

44.
Ag ar zulvez d'abardès
Dezi mo lavaret
Mont da houlen gand e zad
Ma vijenn bet unisset.

45.
Mes allas, pebeus malheur
Evidomp an devez !
Digouet e oa ar goal deod
Gand e falagriez.

46.
Degouet a oa ar gomer
Digand e luerou guenn
A gand e zeod miliget
Da biqua ma chupenn.

47.
Neur antreal bars an ty,
Dar plac'h n'eus lavaret :
« Petra meus clevet, emezi,
Ty eo troublet o speret.

48.
« E morch hont da guemeret
An den-se da bried,
An deus tout an oll fottou
A elfet den da gavet.

49.
« Clevet meus lod o laret
N'eo met eur fenean,
Eur butuner, eur riboter,
Dioualit, plac'h yaouanq.

50.
« Va men choasfet d'eorch unan
Ma kersfech em chilaou,
A herra zo em faros,
Perric an derbodaou.

51.
« Chomet n'eur guerric vihan
Tostic d'ar ster l'Odèt,
A henez eo ar fura
Demeus an oll botret. »

52.
Neuze ar plac'h quen contant
A lavarès de zad :
« Tap, ar voutail pe an tas
Ma nomp beb a lipad. »

53.
Discrouguet e oa ivez
Ar herra andulien
E oa bars ar chiminel
Vit rei d'an itronen.

54.
A bars a pod fer bihan
E oa fritet dezi
An hanter zoussen granpous
Evit e zoulaji.

55.
Neuse tistroas an hent
Neur lipad e muzellou,
Da gonta e oraison
Da bod an derbodaou.

56.
« Debonjour d'eorch, emezi,
Bonjour d'eorch pot Perric,
Men zo bet o houlen evidorch
O mestres Marianic. »

57.
Neuze croazas e zaou zorn,
A laras dar gomer :
« Na gredan quiet ve cavet
Sort d'eorch bars a c'hater

58.
« Da lacaït an union
Etre an dud yaouanq,
A da zonn do unani
Gand o comsou charmant. »

59.
Neuze ieas ar pot Perric
Quent jouaus neur gana,
Da houlen gand Chaques-Coz
E vech vro Mariana.

60.
A ben anter-nos vitin
Teuas ar plach da guer.
Gonezet oa e c'halon
Gand comsou ar gomer.

61.
A ben eis de just goude
Pa velenn anezi,
E oa pot an derbodaou
Coas-a-coas deouti.

62.
Cettu men an den yaouanq
Ello breman lavaret,
Echu dign bars ar bed-man,
Adieu d'am joaustet.

63.
Pa meus collet an tenzor
Gonezet queit al a zo,
Lezet meus anezan don
Gant pot an derbodaou.

64.
A goude c'hoas coll va amser
A va faiamant ivez,
Meus bet nitra met miser,
Tourmant a poan speret.

65.
Nemet pa teomp da zongéal
Mo bet gand ar gomer
Eur chupen ne da visqua
Pa tei ien an amser.

66.
A breman teou song dign
Pa visquign anezi,
E vo ma muia caret
O hont da zimezi.

67.
Racse eta men o ped
Ar re zo deus va c'hlevet,
Na teus quiet da nim flout-re
Bars scochou ar merhet.

68.
Rac tromplet e vech ganto
Ne zalefont quiet pel,
Rac o c'halon zo quen lach
Ma n'eus den vit comprenn.

69.
O pedi ran, potret yaouanq
Var a poent da zimezi,
Na losquet quiet o mestres
Pel amzer da gozi.

70.
Rac alies meus clevet
Lar c'halon ar plach yaouanq
Zo quen traitour a quen lach
D'ar bleuen var a stang.

71.
Ar bleuen tolet ar ster
Red buhan gand a dour,
A calon ar plach yaouanq
Ve peurvuia traitour.

72.
O daou lagad zo mignon,
O bisach zo joatis :
Gant eur galon quen traitour
Eur speret quen tronplus !

73.
A breman men a ello
Da ober pinigen,
A da choas eur lerch distro
Da hortos an termen.

74.
Ma zongign hoas eur vech al
Dont da choas eur vestres,
Mes pa teon da zongéal,
E meus tridiguez.

75.
Pa rencon commans a nevez
Pez mo deja echuet,
Colet a meus va hourach,
Troubli ra va speret.

76.
Pa n'ellan mui o cana,
Mantret eo va c'halon,
Men o pet ta va mestres,
D'echui va chanson.

77.
Ra gouzout e ret deja
Morc'h carguet a speret,
Gand eur voues quen agreabl
Vel hini an elet.

78.
A breman pa zimesforch
Ne po netra da ober,
Nemet canat a fuitellat
Vit caou berr o amser.

79.
Mes breman o pedan hoas
Aroc dont da echui,
Goulennit digant Doue
Barados d'an hini

80.
Ma zo bet coz e zomp bet
An daou nim zeparet,
Gand e c'homsou malicius
Ag e seod miliguët.

81.
Ag evidon men houlen
Ivez ar memes tra,
Goude ma vign partiet
Eus traounien ar bed-ma.

82.
Rei dezo ne varados
Bepred e ne guichen,
En eurustet eternal
A bado da viquen.

83.
A hoas houlen an ivez
Vit ma muia caret,
Graz dei da veva eurus
Assambles gant e fried.

84.
Nep an deus gret ar zon-ma
Zo breman demezet.
En despèt dar goal deotou
Neus cavet ar pried.

85.
Neur ober reflexion
Oant deut da lavaret
Eo essoc'h mont da barados
Vit besa dimezet.

86.
Rac-se eta o pedon,
Potret yaouanq Coray :
Dioualit d'eorch ar merhet
Araok vech tromplet gante.

87.
Gand aon tigouesfet ganoc'h
Evel dign va unan.
Ne po met displujadur,
Chagrin a nehaman.

88.
Unani ganign o moues
Breman, camaradet,
Ni gano bep a gouplat
Da va muia caret.

89.
Pehini zo dimezet
En deus ket hoas pel zo,
Quemeret an deus vit pried
Peric an derbodaou.

90.
A breman man o cana
Couls an nos vel dan de,
Evel ma ra an elez
E barados Doue.

91.
Chans dezo da guendahen
Queit ma vint ar bed ma,
Da gana o chansoniou
Da nim zivertissa.